

(295, suite)

Recit Truezus,
 Var sujet seiz Implijer a zo beuzet e rad
 Montroulez, an 10 eus a vis Even 1831.

Var ton ar Pevan maleur.

Jesus ! Salver ar bed, Majesté souverain,
 C'houi, hed an oll amzer, sourcen a sclérigen,
 Deuxvezit dont d'am c'helen, evit m'ellin recita
 Eur maleur spouronus a ra d'an oll crena.

(296)

An daelou a ziruill demeus va daoulagad,
 Va c'halon, oll mantret, ne ra nemet saillad;
 Pa essân dont da scrifa, em daouarn e stou va fenn;
 Crena ra va mempron, hac e couez va fluen.

Mes, daoust d'am oll trubuil, essât rin disclêria
 D'am c'henn[?]ois christen eur maleur ar brassa
 Zo c'hoarvezet diveza er rad eus a Vontroulez,
 Etrezec ar Francie ha maner Keromnes.

Prestit - ta, me ho ped, hoc'h oll attantion
 Da zelaou eur recit, allas ! zo re guirion:
 Tro vardro da Vontroulez oll e zoar glac'haret,
 O sonjal er maleur pini zo arruet.

An deg aris Even, Montfort, an implijer,
 A gassas urz d'ar Blond eus adraon ar rivier,
 Da vonet gant ar patach ractal da bost ar Guiben,
 Da gaout ar c'hontroler voa ouz o diarben.

Downer, Morvant, Bescond, a antre er patach,
 Ha Mellot ha Montfort, hep dale davantach;
 An avel voa favorapl, hac ec'h arrujont soudan,
 Un heur aroc creizda dirac post ar Guiben.

(297)

Eno an artron Faur, dezgo contoroller,

A zañll bars er patach, gant Barbier, implijer,
Hac e partijont diou'h-tu da vont da groasi er rad;
J'ouais bras e voant oll, bez' o doa amzer vad.

Neuze e c'houarnjont var Castel-ar-Taro,
Hep sonjal, va Doue! e voant tost d'ar maro...
Plouezoc'h ha Klerjomenes e vordejont dioc'h-tu,
Hep eprouv accidant na gén eus a nep tu.

Epad m'vant occupet demeus o bordeou,
E zoa pesqetèrien er rad gant o bagou;
Varru Castel-ar-Taro voa patach Perros cauret,
Hac eur pennad amzer gantàn e zeus comzet.

Mes vandro euy dir heur, rentet etal ar Front,
Selaouit, christèrien, un dra ho sponto tout:
Eur gorventen avel foll a zistrinc var ar patach;
Oll e voant spouronet, hac e sengl oc'hourach.

Henry, hanvet ar Blond, demeus ar vaq patron,
A qui ouz a boes penn: Lauspit ar Scoudou sonn;
Pemp eus ar veltouterien, ger prim evel ay avel,
A zañll tre varneze, o sonjal ober güell.

Ar patach en instant zo carguet eus a zour,
Hac a zo güeledet, hep esper nep sicour;
Euz an euz den voa enni, ne voa var an dour chommet
Nemet ar Blond, patron, ha Montfort, an eilvet. (298)

Neuze an daou den-mâ a gommang da neuzial,
O heuill dinaou an dour hac o tout da zonzjal
Essât ouz patach Perros soudan beza remerqet,
Ar vatimant hepgen 'ellie o c'hemeret.

Bag ar patach, vit güir, direded d'o zicour,
E deus, gant calz a boan, o zennet eus an dour;
Mes allas! ô va Doue! er patach pa voent savet,
Ar Blond voa en bue, mes Montfort voa beuzet.

Montfort zo digasset da entèri d'ar güer;
Ar c'hoec'h maleurus all zo e fong ar rivier:

Bomdez inutilamant gant soign vras e vent clasqet,
Vit ellout o rentà d'an douar beniquet.

Autrou Faur, controler, Downer, sou-letanant,
Barbier, Mellot, Bescond, ha Yoen ar Morvant,
Eo ar c'hoec'h maleurus-se a zalc'h c'hoas ar mór cris:
Lavaromp evito peb a De profundis.

(299) Pa na ellomp, allas! rei nep sicour dezø,
Bretonet christenien, pedomp oll evito,
Evit ma vint recevet etre divroec'h hon Doue
Ebars er Barados. Requiescant in pace.

Peder intañvez pasur a zo bremañ chommet
Gant pèvar varmuguent eus a orfelinet.
Regetomp oll, christenien, ma zeuy Doue d'o c'honsoli,
Hac epad o buez ive d'o protegi.

A. Lédan.

(Vol. VI, p. 295-299.)
18 str. numérotées.